

Sônn Kouz

Ar Roue Gradlon ha Kear-Is

Petra 'zo 'neve e kear-Is,
Mar d-e kent drant ar yaouankis,
Mar klevan-me ar biniou,
Ar vombard hag ann teIennou ?

N'eus e kear Is netra neve,
Rak ar festou-m'ave bemde,
N'eus e kear Is nemed traou koz,
Rak ar festou-m'ave bemnoz.

Bojennou drez zo divoannet
Et dor an ilizou serret,
Ha, var ar beorien o voëla,
E losker ar chas d'ho drailla.

D'ho c'hoezek vla, an oll verc'hed
N'ho deus Doue, met ar pec'hed ;
Ha, da ober he gurunen,
E roont ho c'haëra rozen.

Ahès, merc'h ar Roue Gradlon,
Tân an ifern en he c'halon,
Er penn kenta deus an diroll,
A drein d'he c'heul ar gear da goll.

Sant Gwenole, gant kalonad,
Zo bet meur vec'h o kaoùt he zad,
Ha, gant daëlou, an den Doue
En deuz lavaret d'ar Roue :

« Gradlon, Gradlon laka eves
« D'an dirzurzou a rên Ahès :
« Rak tremenet vo an amzer,
« Pa skuillo Doue he goler.
« El lec'h ma voa c'hoar zadek kent,
« E vo neuze skringnadek dent,
« El lec'h ma voa kanaouennou,
« E vo klevet skrijadennou !... »

Hag ar Roue fur, spouronet,
He verc'h en deus bet kelennet :
Mes, diskaret dre ar gosni,
N'eus mui an ners da stourm out-hi.

Ha, skuiz gant rebechou he zad,
Evit mont d'eus he zaoulagad,
Hi, deus gret, gant droug sperejou,
Eur palès kaër tost d'ar sklujou.

Eno, gant he amourouchen,
Ema fenos an abaden,
Eno en aour hag er perles,
Evel an heol, e par Ahès...

« Plijadur d'ec'h er palès-man,
« Merc'hed chentil ha potred skan,
« Plijadur d'ec'h ha nozvez grên, »
Eme eur Pring, en eur antren.

Ar Pring a zoughe dillat ru,
He varo a voa hir ha du,
He oll izili a verve,
Hag e zaoulagad a zeve.

Ra vio deut mad, estranjour,
Eme Ahès, gant eur bek flour,
Ia, ra viot deut ar gwëlla,
Mar anaveit an traou falla.

Neuze em bo dighemer mad,
A respontas an divroad :
Rak me er fall zo kent disket
Hag an hini, neus her c'hrouet.

Ha kerkent Ahès d'her pedi
Da ober eun dro zanz gant-hi,
Hag an oll, a eneb Doue,
Goassa ma c'hellent a doue.

Pa voa fin d'ar sacrilejou,
Messenger an droug sperejou,
Chomet he-eunan er palès,
A dostaas da gaout Ahès :

« Va douçik koant, merc'h da C'hradlon,
« Ha muia karet va c'halon.
« Ha n'alfen me ket e neb ghis
Gwelet alc'houe sklujou kear Is ».

— « Va zad a zoug en he gherc'hen,
« An alc'houe aour deus eur chaden,
« Ha va zad brema zo kousket,
« Ha kaoùt an alc'houe n'allan ket ».

Mes hen d'he zreid en em-strinkas,
Ha d'he dornik flour a bokas,
Hag e chalmas dre he zellou
Karghet a dân hag a zaëlou.

Hep gout ar pezh a dremene
Neuze, eur penud ac'hane,
En he balès, ar Roue koz
A voa kousket e kreiz ann noz.

Kampr paour Gradlon ne voa enn-hi,
Netra nemet eur grucifi
Douet a zorn eur mignon ker,
Sant Caourantin, Eskop Kemper.

Netra nemet eun Aviel.
Roët c'hôas gant eun den santel,
Roët d'ezhan gant Gwenole,
Evel eur merk a garante.

Kaër en he gosni, 'vel eun Æl,
E kouske Roue Breiz-Izel,
Hag en dro d'he dall, he vlevo gwen
A ree, dispak, eur gurunen.

Neuze, Ahès, ar Brincès-fall,
Evel pa vije skoët dall,
En he gampr, heb aon rag Doue,
Ha deu da laërez an alc'houe.

Eun eur vale, var bek he zroad,
Ar verc'h a dosta skanv d'he zad,
Ha goustadik, deus he gherc'hen,
E tenn, 'neur c'hoarzin, ar chaden.

Piou a deu du-hont gant ar ru,
Pignet va eun hinkane du,
Hag en d'an daou lamm var he ghein,
Ken a strink an tân deus ar vein ?

Hennes eo messenger Doue,
Digasset an Is d'ar Roue,
Hennes eo abostol ar Feiz,
Sant Gwenole, karet e Breiz

Tostât a ra 'neur c'haloupat,
En he zorn deou he vaz Abad,
Hag eur stòl aour var he zaë venn,
Hag eur c'helc'h tan en drô d'he benn.

'Nem gavet e dôr ar palès
He pini e kousk tad Ahès,
Divar he varc'h, an den santel
A c'halv, en nos, a voëz huel :

« Gradlon, Gradlon, sao heb dale,
« Sao evit heuilla Gwenole,
« Sao evit tec'het deus ar mor :
« Sklujou Kear Is a zo digor ! »

Hag ar Roue, koz trubuillet,
Er meaz he vele zo saillet :
« Din-me, din-me, va marc'h prima !...
« Siouas ! Peurgollet ar gear-ma !...

Ha gant glac'har, e ber amzer,
E kerz da heul he vignon ker,
Ha var ho lerc'h, en eur iudal,
E klevont ar môr o ruillal.

Neuze ar Brincès dirollet,
E amourous gant-hi kollet,
Dre gear Is, a glei hag a zeo,
A rede, dispaket he bleo.

Mes pa gleo daou lamp ar c'hezek
Araog ar môr o tiredek,
Dre al luc'hed, gant nec'hamant
E c'hanve he zad hag ar zant.

« Va zad, va zad, ma em c'harit,
« Var ho marc'h skanv a c'hemerit :
Hag heb respont, an tad tener
A zav he verc'h var ann tailler.

Kerkent ar môr a vuanna,
Ha Gwenole, en eur grenna,
A gri : « Gradlon, tól an diaoul-ze,
« Divar dailler da hinkane !... »

Kouskoude c'hoas, leun a enkres,
An tad a zalc'h ar bec'heres :
Mes ar sant a ra sin ar groaz,
A deu hag a sko gant he vaz.

Kerkent mestres an droug speret
A ruill er môr bras fuloret,
Hag e kleo tost ar Roue koz
Eur c'hoarzin skiltr e kreiz an noz.

Mes, rentet skanvoc'h, heb dale,
E sail prim da c'heul Gwenole,
Hag he varc'h, gleb he beder c'harr,
A lamp deur ar môr d'an douar.

Da zao-heol, ar Sant ha Gradlon
A pigne var lein Mene-Hôm,

Pini, he dreid ebarz en trez,
A zaoaz Douarnenez.

Ac'hane, Roue Breiz-Izel
Var he lerc'h a dolas eur zel ;
Mes, e lec'h Is, gant he dek dor,
Ne velas mui nemet ar môr.

« Eur ghear em boa deus ar gaëra,
« Ha chetu hi et da netra !... »
Hag he galon oll a fraillias,
Hag he zaoulagad a voelas.

« D'an daoulin, eme Gwenole,
« Gradlon, d'an daoulin ganem-me. »
Ha Gradlon, dindan he c'hlac'har,
A goë dan daoulin d'an douar.

Hag eno, dispak hé vleo guenn,
Hag he dall pleghet er boultren,
E lavare c'hoas ar Roue :
« Ra vo gret bolonte Doue !... »

Pa zavas divar he zaoulin,
Didan tân flam heol ar mitin,
E velas, a dreuz he zaëlou,
O lugherni *Ru-men-goulou*.

Var men-ze, hon tadou koz
A skuille goad d'eun Doue fos,
Hag ar Roue, e ber amzer,
A lavaras d'he vignon ker :

« Du-hont, e memor a ghear Is,
« Me a rai sevel eun-Ilis,
« Hag evit testeni d'an oll
« M'he galvo Ilis Remengol

« Pa vo an doueou maro,
« Ha koëzet meur a goat dero,
« Eun de, deus pevar avel,
« E teuio d'y, pobl Breiz-Izel.